

ENTRE AR BIK HAG AR GOULMIK

Diwar-benn ar Paün

26

War don : *Petra zo neve en ker Ie ?*

Eun de, eur bik hag eur goulm wenn
O devoa laket en o fenn
Mont d'ober eur gwel karantek
D'an otro Paün, o amezek,

An otro Paün, diouz-tu ma wel
O tostet an diou dimezel,
A ya d'o c'hâd prim ha zeder,
Da digor d'ê dor e vaner.

Goude eur pennadik bizit,
Ar bik, ar goulm yeas e-kwit ;
Hag, en eur vont en-dro d'ar ger,
O zeodo a labouras kaer.

Margot da gento lavaras // He dreid a zo 'giz diou c'holvez
Ar bik a gomzas da gentan :
« Diou c'holvez, emei, 'zo gant-an
« En plas e dreid !... Ha pebez mouez !
« Tewel a dlefe gant ar vez... »

— « Me 'oar mad, eme ar goulmik,
« 'N euz ket ar Paün mouez eun eostik ;
« Koulskoude n'em euz ket kavet
« 'Vije ken dic'hras da glevet.

« E dreid, avad, en gwirione,
« N'em euz kammed zellet out-e ;
« 'Hed hon bizit, ma daoulagad
« War e blu a bare dalc'h-mad.

« O vont, d'ar ninj, a-dreuz ar bed,
« Em euz gwelet treo kaer meurbed,
« Ha plu ar Paüh eo kaeran tra
« Em euz gwelet bete vrema. »

Ar bik, ar goulm ken dizhenvel,
A ro d'ec'h eur gaer a gentel ;
E-lec'h ober evel ar bik,
Kemeret skouer ouz ar goulmik.

Ne weler, siouaz ! peurvuian
Nemet ^{siou} fall an nesan,
Ankouad a rer e zo ouspen
Eur vad benak en o c'hichen.

Graet ar c'hontrol, hag e vo mad ;
E-lec'h trei ho spered dalc'hmad
War ar ^{plou} gwall-siou 'neuz eun den,
Zellet e vertuio hebken.

A. M. D. G.